

Levr ebet

Emañ Gwenola e ti he mignonez Soazig.

- Gwenola.** Pelec'h emañ al levr brezhoneg ?
Soazig. N'ouzon ket. N'eus ket unan war an daol?
Gwenola. Nann, n'eus levr ebet war an daol-se.
Soazig. Sell war ar gwele neuze.
Gwenola. A ya, unan zo aze.

Butun d'ar Sul

War ar straed, un den gant Katell.

- An den.** Mar plij, pelec'h ez eus ur stal-vutun?
Katell. Ahont, e korn ar straed, ez eus unan.
An den. Ya, met n'eo ket digor.
Katell. Serret eo? Dirak an ti-kêr ez eus unan all.
An den. Serret eo ivez.
Katell. A-dreñv an ti-post ez eus unan all c'hoazh.
An den. Pell emañ. N'eus ket unan all tostoc'h?
Katell. Nann, met en ostalerioù ez eus butun ivez.
An den. Sigaretannoù zo, met butun korn n'eus ket.
Katell. Paour kaezh den! N'eo ket ret butuniñ! Ret eo ober sport kentoc'h.

Kegin

Emañ Herve hag Alan er gegin.

- Herve.** Lâr din petra zo er yenerez, Alan.
Alan. Kig zo, ha vioù zo ivez.
Herve. Pet vi zo?
Alan. Tri vi zo. Laezh zo ivez
Herve. Tomatez zo?
Alan. N'eus ket.
Herve. Ro din ar pebr hag an holen.
Alan. N'eus ket pebr na holen er yenerez.
Herve. War ar yenerez ez eus.
Alan. Mat eo ar boued ?
Herve. Tañva!
Alan. N'eo ket fall... Aiou! kalz pebr zo! Pelec'h emañ an dour ?
Herve. Er yenerez, paotr.